

BLOAVEZH MAT!

# Louarnia

*fin ha foll!*

N<sup>nn</sup>148  
Miz Genver  
2015  
Kazetenn vizek



L. Lefeuvre  
'14





P.2 Sandrine hag an delfined

P.3 DEIZIADURIOÙ  
AR BED

P.4-5-6  
**Paotr Louarn**



P.8-9 Da zeiziadur 2015  
da zistagañ !

P.11 **MEURIAD**

P.12  
**Naggeneen**

P.13  
**titeuf**

P.14-15  
**AR  
ROBOTOÙ  
NEVEZ**



« Sandrine, piv a bak an delfined a vez  
gwelet er zooioù ? » **Péreline**



Sot eo ar vugale gant an delfined ! Seblantout a reont bezañ laouen ingal ha plijout a ra dezho c'hoari. Dibar eo sellet ouzh un arvest en un delfinarium (poull-neuial evit an delfined) : lammat a ra an delfined, ar redadeg a reont, kas a reont ganto tud staget deus o fri... Sonerezh a vez hag an holl dud o stlakañ o daouarn. Plijadur penn-da-benn evit an arvestourien. Deus tu an delfined avat, n'on ket sur eo gwall blijus bezañ stanket en ur poull-neuial, ha pa vefe bras. Daoust dezho bezañ maget mat ha karet gant an dud a ra war o zro int o-unan ha pell deus o c'heneiled : an delfined gouez.

En natur e vev an delfined bras (ar re a weler er zoo-ioù) dre degadoù, hag a -wechoù betek kant bennak asambles evit beajiñ pell ha mont da glask boued.

Eus pelec'h e teu delfined an delfinariumoù ? En natur e oa da gentañ al loened a weler en holl barkoù. Da heul zo ganet lod anezho er park ha chomet int eno gant o «zud». Siwazh ne c'hell ket ar parkoù mirout an holl vabiged, rak n'eus ket plas a-walc'h. Alies eta e vez kaset un delfin yaouank pell eus e familh, en ur park all. Met siwazh e vez kendalc'het c'hoazh da bakañ delfined gouez evit gwerzhañ anezho da zooioù. Soñjal a ra din eo trist mirout ouzh delfined zo da vevañ en natur evit un afer gounid arc'hant.



**Petra a soñjez-te ? Hag ezhomm zo digeriñ delfinariumoù nevez ?  
Ne c'hellomp ket ober gant ar re zo outo dija ?**

Sandrine

Respont da Sandrine  
hag embannet e vo !

# E 2015 EMAOMP !

PETRA NEVEZ?

## PAS EVIT AN HOLL...

An deziadur a zo an doare da gontañ ar bloavezhioù, hag an amzer o tremen. Du-mañ e klot hon deziadur gant hini ar relijion Kristen : 2015 bloaz a zo bet war-lerc'h ganedigezh Jezuz-Krist, hervez ar Gristenien. Relijionoù ha kredennoù all zo er bed, ha neuze deziadurioù all ivez !  
 Setu un nebeud re :

### HERVEZ DEIZIADUR BRO-INDIA



Deziadurioù e-leizh a zo e Bro-India, setu eo bet divizet gant ar gouarnamant krouiñ unan diwar an holl re all. Kregiñ a ra o bloaz nevez d'an 22 a viz Meurzh en hon deziadur deomp.

**ER BLOAVEZH 1936  
 E VIMP D'AR POENT-SE.**

### HERVEZ DEIZIADUR BRO-SINA



HA BROIOÙ ALL AZIA AR RETER

D'an 19 a viz C'hwevrer en hon deziadur deomp e krog o bloavezh nevez. Bloavezh ar givri e vo !

**ER BLOAVEZH  
 4713 E VIMP.**



### HERVEZ DEIZIADUR AR VUZULMANED

Kregiñ a ra ar bloaz nevez d'ar 1<sup>añ</sup> a viz Genver en hon deziadur deomp met ne vez ket lidet se gant an holl vuzulmaned.

**ER BLOAVEZH  
 1436 EMAOMP.**




### HERVEZ DEIZIADUR AR YUZEVIEN

Kroget en doa ar bloaz nevez d'ar 24 ha 25 a viz Gwengolo 2014.

**ER BLOAVEZH  
 5775 EMAOMP.**



Ha te, anavezout a rez doareoù all c'hoazh da gontañ ar bloavezhioù ? Lâr deomp !  
 Respont war ya-ouank.com pe dre bostel da camille.kvb@orange.fr hag embannet e vo !



*Korn al lernigoù*

**N'EO KET ECHU !**


### KENSTRIVADEG FOTOIOÙ NEDELEG

PESEURT PROFIOU BRAV TEUS TAPET ?  
 C'HOARIELLOÙ DIBAR ? TRAOÙ FARSUS ?  
 C'HOANT TEUS DA ZISKOUEZ DEOMP ?

KAS UR FOTO OUZHIT O C'HOARI GANT DA  
 BROF EMBANNET A VO DA FOTO HAG UR  
 PROFIG A RESEVI !







OK.  
KEN  
FENOZ.

WAR-BOUEZ  
BLEVENNOU ROUS  
HAG AR SKILFOU,  
PEP TRA ZO NORMAL.

UR  
C'HRENNARD,  
OUT, PAOL!



PA REZ SPORT  
EO RET DIT EN  
EM WALC'HIR  
WAR-LERC'H!

O SELAOU  
EMAOUT?



UN DISTER STRESS,  
GANT MA VO PEP TRA  
MAT AHONT-  
OUF!  
MAT EO.

D'AN OAD  
MA'Z OUT,  
ABALAMOUR D'AN  
ORMONOU...



... KREIV EO  
C'HWEZH KORF  
AR BAOTREP  
YAOUANK!



**KEN  
FENOZ!**

HA  
DREIST-HOLL  
PA-



BLEV ! PENAOS 'TISPLEGIN 'BLAM DA BETRA N'EM EUS KET EZHOMM A LUNEDOU KEN ?

LAVAR A RIN EM EUS LAKAET FERENNOU-LAGAD.



PE, SIMPLOC'H, PAREET EO MA DAOU LAGAD O-UNAN E-KERZH AN NOZ. UR BURZHUP !

C'HOARVEZOUT A RA, 'WECHOU.

'KRED DIN.

O KAOZEAL EUS BURZHUP, 'MAON KET PELL EUS STAL AR FAKIR DOTKI.



PETRA AN DIAOUL EO-SE ?

AMAD 'OA KOULSKOUDE AR STALFOU, UL LAGAD EVEL GOULO.



O ! UR C'HOALA GENAOUEK RAMZEL !



'ISTROGELL' 'NI 'EO, ANAIS, KET 'GENAOUEK'.

PAAÑ 'RIN UR C'HOARIA-DENN DTI MA 'Z OUT FUR.




LAR DIN, NE OA KET UR STAL TROIOU-HUP AMAD, GWECHALL ?

TROIOU-HUP ? EVEL TREN AN TASMANTOU ?



KENTOC'H UR STAL STROBINELLAD E LEC'H MA VEZE RAKWELET AN TONKAD.\*

MAM, MARTEZE, PERAK ?



O, MOD-SE...

MALL ZO WARNON BEZAN E VAKANSOU, FENNOZ !

CASH !



LAR DIN 'TA, INERVET MAT 'OA NIZAR WAR DA LERC'H, DECH DA NOZ.

YA. HA NEUZE ?

ha foll!



# Louarnig

## GWENGOLO

MO	MA	ME	MER	YA	GW	SA	SU
						1	2
						...	...
5	6	7	8	9			
12	13	14	15	16			
19	20	21	22	23			
26	27	28	29	30			

hini eo!

LU	ME	MER	YA	GW	SA	SU
	1	2	3	4	5	6
7	8	9	10	11	12	13
14	15	16	17	18	19	20
21	22	23	24	25	26	27
28	29	30	31			

Kregiñ a ra an  
diskar-amzer

## KERZU

MO	MA	ME	MER	YA	GW	SA	SU
						5	6
						12	13
						19	20
						26	27

Devezh etrebroadel  
gwirioù ar vugale

ezel bed  
1918

LU	ME	MER	YA	GW	SA	SU
		1	2	3	4	5
6	7	8	9	10	11	12
13	14	15	16	17	18	19
20	21	22	23	24	25	26
27	28	29	30	31		

Kregiñ a ra  
ar goañv

Kalanna

Nedeleg  
Laouen!

# 2015

ur bloavezh  
fin ha fo

## GENVER

Gwastell  
ar Rouanez

LU	ME	MER	YA	GW	SA	SU
			1	2	3	4
5	6	7	8	9	10	11
12	13	14	15	16	17	18
19	20	21	22	23	24	25
26	27	28	29	30	31	

## C'HWEV

LU	ME	MER	YA
2	3	4	
9	10	11	
16	17	18	
23	24	25	26

Meurlarjez 

## EBREL

LU	ME	MER	YA	GW	SA	SU
		1	2	3	4	5
6	7	8	9	10	11	12
13	14	15	16	17	18	19
20	21	22	23	24	25	26
27	28	29	30			

Pask 

## MAE

LU	ME	MER	YA
4	5	6	7
11	12	13	14
18	19	20	21
25	26	27	28

Fin ar brezel 1939-1945

« Gouvel Erwan »  
Fest Breizh 

h  
ll !



# Louarnig

tresadenn gant L. Lefeuvre

## VRER

YA	GW	SA	SU
			1
5	6	7	8
12	13	14	15
19	20	21	22
26	27	28	

## MEURZH

LU	ME	MER	YA	GW	SA	SU	
						1	
2	3	4	5	6	7	8	
9	10	11	12	13	14	15	
16	17	18	19	20	21	22	
23	24	25	26	27	28	29	
30	31	Nevez-amzer				Mont a ra an eur war-gil	

## E

Fest al labour

YA	GW	SA	SU
	1	2	3
7	8	9	10
14	15	16	17
21	22	23	24
28	29	30	31

## EVEN

LU	ME	MER	YA	GW	SA	SU
1	2	3	4	5	6	7
8	9	10	11	12	13	14
15	16	17	18	19	20	21
22	23	24	25	26	27	28
29	30	Fest ar sonerezh...				

... ha deiz ken-  
tañ an hañv!

# 2015



## GOUERE

Ha setu ar vakañsoù-hañv!

YEAH!

## EOST

Fest broadel

Bro-C'hall

LU	ME	MER	YA	GW	SA	SU
		1	2	3	4	5
6	7	8	9	10	11	12
13	14	15	16	17	18	19
20	21	22	23	24	25	26
27	28	29	30	31		

LU	ME	MER	YA
3	4	5	
10	11	12	13
17	18	19	20
24	25	26	27
31			

An distros-skol ar

## HERE

LU	ME	MER	YA	GW	SA	SU
				1	2	3
4	5	6	7	8	9	10
11	12	13	14	15	16	17
18	19	20	21	22	23	24
25	26	27	28	29	30	31

Halloween 🍎


mont a ra an eur war-raok!

Gouvel an Hollsent

## DU


LU	ME	MER	YA
1	2	3	4
8	9	10	11
15	16	17	18
22	23	24	25
29	30		

Fin ar br 1914-




\*Poan-benn a c'hoarvez d'unan goude bezañ lonket alkohol betek re.

EVEL MA VEZ KUSTUM AN HOLL DUD DEGEMERUS D'OVER, E VOE FARDET UR FRIKO BRAS HA LIPOUS GANT AR «PUCKWOODGENIED EVIT NAGGENEEN.




Maiz  
Viou laouenaniged  
gant togou-touseg  
Cranberries gant  
siros skav-gwrach<sup>1</sup>  
Riz gouez ha  
kourjez e-leizh  
Menen ha lammerzed friket<sup>2</sup>  
Tomatez fardet gant  
avalou-douar ha riz  
Galetez maiz gant mel

GANT TOUT SE E DA EVAJOU DIBAR : SEV BEZV<sup>3</sup> HA JUG KASTRIHEZ, KAVOUT A REAS NAGGENEEN AN EVAJOU-SE MAT KEN-HA-KEN.



EVIT LAKAAT AR BOUED DA ZISKENN E KINNIGAS WICAYAPAZIPA-PASU DA NAGGENEEN BUTUNAT GANT AR C'HORN-BUTUN BRAS. KOLLET EN DOA NAGGENEEN E HINI. ASANTI<sup>4</sup> A REAS LAOUEN.




KEN KREIV E SACHAS WAR AR C'HORN MA TIFOLPAS MOGED DEUS E ZIVSKOUARN !



REIV A REAS AR C'HORN D'E AMEZEG...



HAG EN EM ROAS DA GOUSKET DON.



UR C'HOUISK LIVET HA LAOUEN E VOE, MET NE BADAS KET, SIWAZH...

1 : laboused bihan.  
2 : gwez bras a vez gwelet e Amerika.

3 : poazhet eo bet an amprevaned.  
4 : 'jug' ur wezenn a Vro-Ganada

# titeuf

## ar skol-erch 2



Tennet eus « Kenô Bed Kriz »  
www.b-heol.com



a-benn nebeut...



# UR ROBOT er gêr ?

Dont a-benn da grouiñ robotoù hag a c'hellfe servijout an dud war ar pemdez zo **unan eus kaerañ hunvreoù Mab-den**. Marteze a-benn nebeut e vo posupl d'unan kaout **ur robot er gêr ?!**

Ijin 'ta ! Dont a rafe ur robot da zihuniñ ac'hanout, da lavar dit peseurt deiz eo, hag eo ret dit sevel evit mont d'ar skol... Marteze e vefe gouest da c'hoari ganit, ha da reiñ skoazell dit gant al labour-skol !




Gant skiantourien eus Bro-C'hall zo bet ijinet seurt robot. C'hoant o deus bet krouiñ **robotoù gouest da aesaat buhez an dud.**



NAO, bidoc'hig ar familh, a c'hell bezañ barrek e matematikoù hag en holl zanvezioù-skol : galleg, geografiezh, istor... Gouest eo da lakaat ar vugale da adlenn o c'hentelioù. Gouest eo ivez da c'hoari !


Evit ober tout se e **vez enrollet programmoù ennañ** : da lavaret eo e vez displeget dezhañ en a-raok petra ober pa c'hoarvez tra-mañ-tra. **Ne c'hell ket ar robotoù soñjal o-unan.**





©Aldebaran Robotics

# NAO



**58 santimetr**

Ijinet eo bet evit bezañ evel ur mignon d'an dud. Kaozeal a ra, respont a ra d'ar goulennoù savet outañ. Gouest eo da ganañ, da zañsal, da gerzhout, hag ur bern traoù all. Bez' zo ijnourien o krouiñ dezhañ barregezhioù c'hoazh.

# PEPPER

**1m21**

Setu robot nevesañ ar familh. Perzhioù dibar en deus Pepper : ijinet eo bet evit bezañ gouest da gompren santimandoù an dud. Pa vezer fuloret, trist, laouen, pe o c'hoarzhin... ha cheñch a ra e emzalc'h diouzh ret. Derc'hel a ra soñj deus ar pezh a vez lavaret dezhañ. Gouest eo da sikour er statioù evit reiñ alioù d'an dud, da skouer, ha da gaozeal e-pad pell gant unan bennak...




©Aldebaran Robotics



©Aldebaran Robotics

# ROMEO



**1m40**

N'eo ket ganet Romeo c'hoazh. Ijinañ ur robot bras ha solut a-walc'h evit gallet mont gant an diri, kemer un dra, dougen traoù all, digeriñ un nor eo ar raktres. Gouest e vefe da sikour er gêr un den ha n'eo ket gouest d'ober tout an traoù-se, da skouer. Ur robot hag a c'hellfe sikour tud kozh war ar pemdez an hini eo.




Ha te, plijout a rafe dit kaout ur robot er gêr ? er skol ?  
Gallout a rafe dont da vezañ ur mignon dit, hervezout ?  
Respont dre bostel da [camille.kvb@orange.fr](mailto:camille.kvb@orange.fr) hag embannet e vo !



**YEAH!**

UN NIVER...



20

milion a robotoù a vo tro-  
dro deomp a-benn 5 bloaz :  
en o zouez ar robotoù-  
kegin pe da c'hoari ganto,  
reoù an uzinoù, an arme...  
e pep lec'h e vint !


# KRAK HA BERR

Traouigoù pe  
titouroù fentus !

Dit da ginnig ivez !  
Kas ur postel da  
camille.kvb@orange.fr

UN DEIZ...

D'AN 21  
A VIZ GENVER



eo devezh broadel  
ar moumounoù !

## SELL'TA !

Kondor an Andoù  
eo labous brasañ ar bed  
(Amerika ar Su)



## GWASTELL AR PREZIDANT

O fardañ gwastell ar rouanez  
Prezidant Republik Frañs, ne  
lakont ar vouloñjerien  
favenn ebet enni.  
Perak'ta ?  
Arabat d'ar Prezidant bezañ  
kurunet na c'hoari bezañ  
ur Roue... !



## HA GOUZOUT A REZ...

Petra `dalvez ar panell-se ?



Ret eo d'an holl a ya gant o  
belo bale war an hent -se.  
An holl banelloù ront a zo ur  
redi.

## YEZH AR SINOÙ

Evit sinañ :  
«sec'hed `m eus»

Piñs gant  
da viz-  
meud ha  
da viz-yod  
d'an nec'h  
betek  
an traoñ.



©Marianne Larval

## BRAMMOÙ

PROUT

a zo anv ur stêr etre Bro-  
Romania ha Bro-Voldavia,  
tost ken hir hag al Liger.  
(953km) !

Deomp da besketa ?

## DIVIN'TA

Peseurt loen en deus  
ar muiañ a zent ?



Al logodennig !